

# LOUNK - HE - ZIZHUN

ALLEGRO.



Je - rom an teo, me 'zo lez - han - vet,



A - raog an dour me lamfe e tan; Noz deiz e'm dorn eur



ve - ren gar - get, Va bar - ri - ken a c'ho - ro - an;



E'n eur li - pad va mour - rou, E - va a leiz



va gi - nou Ban - ne - ou, Ia da, Ia da,



Se - tu pe - tra 'ra, Holl pli - ja - dur Je - ro - mou.

II

E'r skolachou ne zeskis taken;  
Ar studi ne daly ket ar boan.  
Latin, gregach, histor ha fablen  
Ne rontaont ket eur c'hof moan.

Mestrez an holl skianchou,  
Eo, sevel hep arvechou

Banneou.

Ia da, ia da,

Setu petra 'ra,

Holl gwezieg Jeromou.

I

Prezeger, e'n da gador, weziek  
Te ' gaoze flour, te barlant mad:  
Ouz da glevet, an ezen gornek  
A zigor frank ho daoulagad.

Dalc'h gan-hez da sermoniou,  
Ne c'hlembont tam va ginou.

Banneou!

Ia, da, ia da,

Setu petra 'ra,

Deskadurez Jeromou.

IV

Ouz taol, e'n eur leina, dibreder,  
Kaout lamm klok digant he veren;  
E'r c'hao da furchal pa ziskenner  
Guelet seac'h-korn pep barriken;

E leac'h suna 'boutailloù  
Goulen digant ar punsou

Banneou!

Ia, da, ia da,

Setu petra 'ra,

Holl dizesper Jeromou.

V

Guella 'zo, dious madou 'r bed-ma  
Va c'haloun a zo distag mad;  
Teuzi va oll danvez hep gina,  
Koueza paour hep gouela berad,

Guerza tok, guele, boutou,  
Evit kaout, a govajou

Banneou.

Ia, da, ia da,

Setu petra 'ra,

Brassa vertus Jeromou.

VI

Pa vo peur-zibunet va c'huden,  
Ha me rankout lamet e'r bail,  
Ne glaskin na kroas na metalen  
Me gasso ganben eur vontail;

Gellout, e leac'h pateriou  
Kana var choung an Ankou!

Banneou!

Ia, da, ia da,

Setu petra 'ra,

Oll c'hoantegez Jeromou.